



LEVRIG DEGEMER EVIT FAMILHOÙ

SKOLAJ DIWAN JAKEZ RIOU

LIVRET D'ACCUEIL DES FAMILLES

DU COLLÈGE DIWAN JAKEZ RIOU





KINNIG HOLLEK



Lec'hiet eo ar skolaj e akademiezh Roazhon (Zonenn B)
Evezhiet gant ministrerezh an deskadurezh Stad
Statud : Prevez kevrataet, lik
Enframmet e rouedad Diwan : 46 skol, 6 skolaj, 2 lise

An deskadurezh	gant...
<ul style="list-style-type: none">X E brezhonegX O heuliañ ar programmoù ofisielX E-lec'h ma vez roet pouez d'ar yezhoùX Evit ezteurel dre gomzX Evit reiñ sikour pleustrek da bep hiniX E dibenn an 3de klas: An AKED / DIBAB hag ar breved Stad (DNB)	<ul style="list-style-type: none">X 8 klasad (2 glasad e pep live)X Tro-dro 170 skolajiadX 20 kelennerX 1 rener (Erwan ar Berr)X 1 sekretourez (Soazig Le Breton)X 1 c'hontauouer (Arnaud Gestin)X 2 benngasourezX 6 kasourX 2 skoazeller buhez-skolX 2 implijad (kempenn & labourioù)
Ur vuhez e brezhoneg <ul style="list-style-type: none">X Sevenadur: sonerezh, c'hoariva, sinema, arzoù...X A-stroll: hunva, beilhadegoù, kleuboù, Tiegezhioù ...	

PRÉSENTATION GÉNÉRALE



L'établissement est situé dans l'académie de Rennes. (Zone B)
Tutelle : ministère chargé de l'Éducation nationale
Statut de l'établissement : privé sous contrat, laïque
Intégré au réseau Diwan : 46 écoles, 6 collèges, 2 lycées

L'enseignement	Avec...
<ul style="list-style-type: none">X En langue bretonneX Suivant les programmes officielsX Un apprentissage renforcé des languesX Priorité à l'expression oraleX Suivi pédagogique personnaliséX En fin de troisième : l'AKED / DIBAB et le brevet (DNB)	<ul style="list-style-type: none">X 8 classes (2 classes par niveau)X 170 élèves environX 20 enseignantsX 1 directeur (Erwan Ar Berr)X 1 secrétaire (Soazig Le Breton)X 1 comptable (Arnaud Gestin)X 2 animatrices principalesX 6 animateursX 2 Auxiliaires de vie scolaire (AESH)X 2 employés (entretien & travaux)
Une vie en breton <ul style="list-style-type: none">X Culture: musique, théâtre, cinéma, arts...X Collectivité : internat, veillées, clubs, Tiegezhioù ...	

BERR-HA-BERR... ISTOR AR SKOLAJ

A-raok 1997 : Start 'oa da skolajidi Kerne kenderc'hel gant o studioù e brezhoneg. Lod a yae betek skolaj Diwan ar Releg -Kerhuon (digoret e 1988)

Gwengolo 1997 : Skolaj Diwan Kemper 'oa digoret er c'hloerdi kozh Kerfeunteun. D'ar mare- se 'oa staget ouzh skolaj Roparz Hemon (Releg-Kerhuon).

Gwengolo 1999 : Digoret 'oa Skolaj Gwened; betek-henn e teue skolidi eus Bro-Wened ha Naoned betek Kemper.

Gwengolo 2004. Dilojet 'oa war-zu Penharz, e skol gozh Kervoazan, anvet skol Louis Hemon kentoc'h.

2005: En enor da skrivagner Lotei, anvet eo hor skolaj "Skolaj Diwan Jakez Riou", ha deuet distag diouzh skolaj ar Releg-Kerhuon da-heul.

Gwengolo 2012: Ti ragaozet ar porzh, e stad fall pelloc'h, zo bet savet un ti greantel en e lec'h.

2017: E-kerzh fest an 20 vloaz oa bet anvet levraoueg ar skolaj "Levraoueg Martial Ménard" en enor dezhañ.

EN BREF... L'HISTORIQUE DU COLLÈGE

Avant 1997 : Les élèves du pays de Cornouaille pouvaient difficilement poursuivre leur scolarité en breton. Certains se rendaient au collège du Releg-Kerhuon. (ouvert en 1988)

Septembre 1997 : Ouverture du collège à Kemper, en tant qu'annexe du collège Roparz Hemon du Releg-Kerhuon, dans l'ancien séminaire de Kerfeunteun.

Septembre 1999 : Ouverture du collège de Vannes (Gwened), certaines familles du pays vannetais ou nantais scolarisaient leurs enfants à Kemper avant cette date.


Septembre 2004. Déménagement à Penharz dans l'ancienne école publique de Kermoazan, appelée alors Ecole Louis Hémon.

2005 : En hommage à l'écrivain de Lotei (Lothey), le collège est baptisé « Skolaj Diwan Jakez Riou ». Il devient indépendant du Releg-Kerhuon par la suite.

2012 : Les préfabriqués vétustes situés sur la cour sont remplacés par de nouveaux bâtiments modernes.

2017 : Pour le vingtième anniversaire du collège, en hommage à Martial Ménard, le CDI prend son nom.

EMDROADUR AN NIVER A SKOLAJIDI HA RAKWEL ÉVOLUTION DES EFFECTIFS ET PROJECTION



1 SKOLAJ, DIV GEVREDIGEZH

Div gevredigezh, gant tud skolidi dreist-holl, a labour bemdez evit reiñ aoziou skoliata brav d'hor bugale :

- X Ar gevredigezh « Skolaj Diwan Jakez Riou » : renet gant ur c'huzul-merañ, CA e anv boas. Merañ a ra al lojeiz, an darempredoù gant ar gevellerien, ar gopriddi, an hunva, ar c'hantin, an dafar...
- X Ar gevredigezh « Kuzul-skoazell Skolaj Diwan Jakez Riou » : renet gant ur c'huzul-merañ ivez, met digor d'an holl eo emvodoù ar c'huzul-skoazell. Dastum arc'hant evit arc'hantañ ar skolaj eo e labour. E bal : reiñ 15 000 € bep bloaz d'ar gevredigezh « Skolaj Diwan Jakez Riou ».

1 COLLÈGE, DEUX ASSOCIATIONS

Deux associations, composées essentiellement de parents, œuvrent au quotidien pour que la scolarité se passe dans les meilleures conditions possibles :

- X L'association « Skolaj Diwan Jakez Riou » : dirigée par un conseil d'administration (appelé couramment kuzul-merañ ou CA), elle gère les locaux, les relations avec les partenaires, les salariés, l'internat et la cantine, le matériel...
- X L'association « Kuzul-skoazell Skolaj Diwan Jakez Riou », comité de soutien, également dirigée par un CA, mais de fait, toutes les réunions sont ouvertes à tous. Elle a comme mission de récolter des fonds pour aider au financement du collège. Son objectif est de faire remonter 15 000 € chaque année à l'association « Skolaj Diwan Jakez Riou ».

Izili kuzul-merañ ar skolaj	Membres du conseil d'administration du collège
X Ar rener	X Le directeur
X Etre 10 ha 20 den (tadoù ha mammoù)	X Entre 10 et 20 parents d'élèves
X 1 dileuriad eus rouedad Diwan	X 1 représentant du réseau Diwan
X 2 dileuriad an implijidi	X 2 représentants du personnel
X Ur benngasourez	X Une animatrice principale
X Dileuridi dilennidi ar c'horn-bro	X Représentant des élus locaux

AL LEC'H

E Penharz, e kornôg Kemper
5, Straed Vañde
29000 Kemper

Blog ar skolaj : <http://jakezriou.com/>

Chomlec'h mail :
skolaj.jakez.riou@diwan.bzh



SITUATION

À Penharz à l'ouest de Kemper
5, rue de Vendée
29000 Kemper

Blog ar skolaj : <http://jakezriou.com/>

Chomlec'h mail :
skolaj.jakez.riou@diwan.bzh



Eus 8 skol Diwan ha eus skolioù divyezhek Kerne izel e teu ar skolajidi.

Des élèves qui viennent de 8 écoles Diwan et des écoles bilingues de Cornouaille.

Er memes lec'h 'kaver ar skol kentañ derez, ar skolaj ha Kelenn (kreizenn stummañ kelennerien ar skolioù).

Sur le site : une école primaire, le collège et Kelenn (centre de formation des professeurs des écoles)

AR C'HENTELIOÙ E 6^{VED}

Ar programm ofisiel kelennet e brezhoneg, sevenadur Breizh ouzhpenn...	Salioù
<ul style="list-style-type: none"> X 10 kelenner disheñvel X Prantadoù ¾ eur X 5 prantad e hanter strolladoù bep sizhun X 4 frantad studi (1 heñchet gant kelennerien) X Kentelioù etre 8e25 ha 5e X Kentel ebet d'ar Merc'her X 11 danvez kelennet e brezhoneg, ur plas dibar d'ar yezhoù. 	<ul style="list-style-type: none"> X 8 sal glas X Sal ar skiantoù X Sal an deknologiezh / urzhiataerezh X Sal an arzoù X Al levraoueg X An oaled X Oberiantizoù 'zo a vez graet e sal an Dachenn Wenn, e salioù sport Kerlann vihan (Sal dojo, hand ball, badminton...) hag e Kervahud.

LES COURS EN 6^{ÈME}

Enseignement du programme officiel en breton et la culture bretonne en plus...	Salles
<ul style="list-style-type: none"> X 10 professeurs différents X Des cours de ¾ heure X 5 cours en demi groupes chaque semaine X 4 cours de permanence (dont 1 cours d'accompagnement personnalisé) X Cours de 8h25 à 17h X Pas de cours le mercredi X 11 matières enseignées en breton, une place primordiale aux langues. 	<ul style="list-style-type: none"> X 8 salles de classe X Une salle de sciences X Une salle de technologie et informatique X Une salle des arts X Le CDI X Le foyer X Certaines activités ont lieu au Terrain Blanc, à la salle de sport de Kerlann Vihan (salle de dojo, handball, badminton...) et à Kervahud.



SKOUER IMPLIJ AMZER

UN EXEMPLE D'EMPLOI DU TEMPS

	lundi	mardi	jeudi	vendredi			
8h25	GALLEG / Français GUIRINEC Maï-Wenn Laporte Yannig (acc.)	ISTOR-GEO-KEO / H-G-EMC ANDRO Mireille Laporte Yannig (acc.)	SAOZNEG / Anglais RUELLAN Youna	MATEMATIKOU / Mathématiques PLUSQUELLEC Tangui Laporte Yannig (acc.)			
9h10 9h15		BREZHONEG / Breton GLOAGUEN Marine Laporte Yannig (acc.)	UKHRA BALEM M. [SG S.2] Sal deknologiezh	STUDI / Etude wKasour 2 [SG S.1]	UKHRA BALEM M. [SG S.1] Sal deknologiezh		
10h00	DKS / EPS PERENNOU Laouig DKS L	GALLEG / Français GUIRINEC Maï-Wenn Laporte Yannig (acc.)	C'HOARIVA / Théâtre JOURDAN Yann-Edern Sal an arzou	UKHRA BALEM M. [SG S.2] Sal deknologiezh Laporte Yannig (acc.)	STUDI / Etude wKasour 2 [SG S.2]	ISTOR-GEO-KEO / H-G-EMC ANDRO Mireille Laporte Yannig (acc.)	
10h05							A
10h50	DKS / EPS PERENNOU Laouig DKS L	DKS / EPS PERENNOU Laouig DKS L	SVD / SVT BARVEG Fañch [SG S.1] Sal ar skolezh	SKRIANT BALEM M. [SG S.2] Sal deknologiezh Laporte Y. (acc.)	MATH PLUSQUELLEC [SG S.1] [SG S.2] Laporte Y. (acc.)	ISTOR-GEO-KEO / H-G-EMC ANDRO Mireille Laporte Yannig (acc.)	
10h55							A
11h05	DKS / EPS PERENNOU Laouig DKS L	DKS / EPS PERENNOU Laouig DKS L	SVD / SVT BARVEG Fañch [SG S.1] Sal ar skolezh	SKRIANT BALEM M. [SG S.1] Sal deknologiezh	MATH PLUSQUELLEC [SG S.1] [SG S.2] Laporte Y. (acc.)	LATIN BORONKAI Katalin Levraoueg Laporte Yannig (acc.)	SKIANT BALEM M. Sal deknologiezh Laporte Y. (acc.)
11h50							
11h55	DKS / EPS PERENNOU Laouig DKS L	DKS / EPS PERENNOU Laouig DKS L					
12h40			ISTOR-GEO-KEO / H-G-EMC ANDRO Mireille	MATEMATIKOU / Mathématiques PLUSQUELLEC Tangui	MATEMATIKOU / Mathématiques PLUSQUELLEC Tangui	STUDI / Etude w Kasour	
12h45			A	B	B	A	B
13h30	LEVRAOUEG / CDL BORONKAI Katalin [SGFRANC] Levraoueg Heuliañ Hiniemetaat / A. P. MALIGORN Nikolaz [SGMATHS] Sal deknologiezh Heuliañ Hiniemetaat / A. P. ANDRO Mireille [SGAEAID] Laporte Yannig (acc.)	STUDI / Etude wKasour 2	GALLEG / Français GUIRINEC Maï-Wenn Laporte Yannig (acc.)	GALLEG / Français GUIRINEC Maï-Wenn	BREZHONEG / Breton GLOAGUEN Marine	GALLEG / Français GUIRINEC Maï-Wenn [SG S.1]	BREZHONEG / Breton GLOAGUEN Marine [SG S.2] Sal ar strolladoù Laporte Yannig (acc.)
13h35		A	B	A	B	B	A
14h20	MATEMATIKOU / Mathématiques PLUSQUELLEC Tangui Laporte Yannig (acc.)	BREZHONEG / Breton GLOAGUEN Marine Laporte Yannig (acc.)	SONEREZH / Education musicale LESCOP Soaz Sal an arzou	GALLEG / Français GUIRINEC Maï-Wenn [SG S.2] Laporte Yannig (acc.)	BREZHONEG / Breton GLOAGUEN Marine [SG S.1] Sal ar strolladoù	MATEMATIKOU / Mathématiques PLUSQUELLEC Tangui Laporte Yannig (acc.)	BREZHONEG / Breton GLOAGUEN Marine [SG S.1] Sal ar strolladoù
14h25							
15h10	ARZOU AR GWELED / Arts visuels ORRIGER Sonia Sal an arzou	SVD / SVT BARVEG Fañch Laporte Yannig (acc.)	SKIANT BALEM M. Sal deknologiezh Laporte Y. (acc.)	STUDI / Etude w Kasour	ISTOR-GEO-KEO / H-G-EMC ANDRO Mireille		
15h25			A	B			
16h10	EMVOD KLASAD / Vie de classe ANDRO Mireille	SAOZNEG / Anglais RUELLAN Youna	MATEMATIKOU / Mathématiques PLUSQUELLEC Tangui Laporte Yannig (acc.)		SAOZNEG / Anglais RUELLAN Youna		
16h15							
17h00							

Kelennet e vez ar programm ofisiel e brezhoneg ha sevenadur Breizh ouzhpenn !

Adalek 5e05 e vez ar c'hleuboù ha war-lerc'h ur prantad studi.

Nous suivons les programmes officiels, avec le breton et la culture bretonne en plus !

A partir de 17h05, les élèves participent aux clubs puis à l'étude du soir.

OBERIANTIZOÙ AR SKOLAJIDI 'MAEZ AR C'HENTELIOÙ

- X Ar prantadoù Tiegezhioù liveoù mesket war-lerc'h pep mare vakañsoù
- X Sinema (Skolaj er sinema ha kenlabour gant Daoulagad Breizh)
- X Sevel filmoù chakod (6^{ved})
- X Sevel ur pezh c'hoari (4^{re}) gant sikour ar strollad La Obra
- X Troiadoù 'maez ar skolaj
- X Abadennoù sport
- X Forom Diwan an heñchañ
- X Beaj kenvevañ (6^{ved})
- X Beajoù yezh (5^{ved}), Eskemm gant Euskariz (3^{de}) ha Sorabiz (4/3^{de})



Lakaet 'vez ar skolajidi da gemer perzh e buhez ar skolaj (Kuzul skolaj, Bodad glas, Bodad boued...)

Ar c'hleuboù (digor d'an holl d'al Lun ha d'ar Yaou) etre 5e05 ha 5e45 :

- X Sport (UNSS)
- X Labour dorn
- X Boks gall
- X C'hoarioù roll
- X C'hoariva
- X Levraoueg
- X ha traoù all...

LES ACTIVITÉS DES ÉLÈVES EN DEHORS DES COURS

- X An tiegezhioù: des activités interclasses en breton après chaque période de vacances.
- X Cinéma (Collège au cinéma et partenariat avec Daoulagad Breizh)
- X Réalisation de films courts en breton (Filmoù chakod) en 6ème.
- X Pièce de théâtre en 4ème (avec l'aide de la troupe La Obra)
- X Sorties diverses
- X Activités sportives
- X Forum Diwan des métiers
- X Séjour d'intégration des 6èmes
- X Voyage linguistique (5ème), échanges avec des Basques (3ème) et des Sorabes (4/3ème)

Les élèves sont impliqués dans la vie du collège (Conseil d'établissement, commission restauration, commission des éco-délégués...)

Les clubs (ouverts à tous les lundis et jeudis de 17h05 à 17h45) :

- X Sport (UNSS)
- X Loisirs créatifs
- X Boxe française
- X Théâtre
- X Bibliothèque
- X Jeux de rôle
- X et d'autres choses encore...

BEAJ KENVEVAÑ AR RE 6^{VED}

Bep bloaz e ya ar skolajidi 6ved da Derrug evit ur veaj ober anaouedegezh e miz Gwengolo. Ouzhpenn ober anaouedegezh gant skolidi a orin eus skolioù all, o deus tro da bleustriñ sportoù a bep seurt: Kraperezh, karr dre lien, kanoe...

LE SÉJOUR D'INTÉGRATION DES 6^{ÈMES}

Tous les ans, les 6^{èmes} participent à un séjour d'intégration en septembre. Le but est de faire connaissance entre élèves originaires de différentes écoles en pratiquant plusieurs activités sportives : escalade, char à voile, canoë...



SAL DEBRIÑ

LE RÉFECTOIRE

2 servij
11e50 - 12e45
12e40 - 1e35

2 services:
11h50 - 12h45
12h40 - 13h35

- X Fardet 'vez boued gant ADC (Kan Ar Mor).
- X Gwiriet eo ar meuzioù gant ur reolier boued.
- X Kalz a choaz
- X Priorelezh d'ar produioù eus ar vro.
- X Produioù a galite (Label ruz...)

- X Les repas sont réalisés par les Ateliers de Restauration ADC (Kan Ar Mor).
- X Les menus sont contrôlés par un diététicien.
- X Beaucoup de choix
- X Priorité est donné au circuit court.
- X Produit de qualité (Label rouge)



HUNVA	L'INTERNAT
X Hunva paotred / merc'hed	X Internat garçons / filles
X 'ba Ti ar Brug (Penharz)	X A Ti ar Brug (Penharz)
X Tro-dro 40 % eus ar skolajidi	X Environ 40 % des collégiens.

1997 : 1997: Da-gentañ 'oa an hunva stag ouzh ar skolaj 'ba Kerfeunteun. Da neuze e oa diabarzhiat hogos hon holl skolajidi, zoken ar re a oa o chom e Kemper.

2004-2023 : Cheñchet eo meur a wech lec'h an hunva dibaoe emañ ar skolaj 'ba Penharz. An ti-annez a zo bet e-pad daou vloaz e kreizenn vakañsoù Berry-Tudy en Enez-Tudi (2004-2006) ha war-lerc'h e Kambr Micherioù Penn-ar-Bed (2006-2008). Gant adnevezadur Kuzon hon eus ranket mont kuit da lojañ e kreizenn Kerheol an ULAMIR e bourc'h Plogastell Sant-Jermen (2008-2019) ha dilojet adarre evit en em gavout en-dro er greizenn Berry-Tudy en Enez Tudi. (2019-2024)

Abalamour ne zisoc'he ket raktres hunva Kerbernez (Ploveilh) hon eus kavet benn ar fin un diskoulm padus evit gallout lojañ hor skolajidi 'tal kichen ar skolaj, e ti ar Brug (Penharz) e kreizenn Kroashent Kerne.

1997 : Au début, l'internat se situait dans les mêmes bâtiments que le collège à Kerfeunteun. Pratiquement tous nos collégiens étaient internes, même ceux qui habitaient Kemper.

2004 : Depuis l'installation du collège à Penhars, l'internat a déménagé plusieurs fois: au centre de vacances Berry- Tudy à l'Ile-Tudy (de 2004 à 2006) puis à la Chambre des Métiers du Finistère (de 2006 à 2008), dans les locaux du centre Kerheol de l'ULAMIR à Plogastell Saint-Germain entre 2008 et 2019 avant de revenir à l'Ile Tudy. (2019-2024)

Le projet d'internat à Kerbernez (Plomelin) n'aboutissant pas, nous trouvons enfin une solution pérenne à proximité du collège à l'ancien EHPAD des Bruyères de Penhars, dans le centre Kroashent Kerne.



MA ZAMM BUHEZ DIABARZIAD.EZ

- X 5e05 : mare ar c'hleuboù (dudi)
- X 5e50 : prantad studi noz
- X 6e40 : koan



B' an hunva

- X 8e10 : c'hoarioù en oaled
pe beilhadeg
- X 9e20 : lazhet 'vez ar gouloù

Da vintin

- X 7e00 : dihuniñ
- X 7e00 : dijuni

MA VIE D'INTERNE

- X 17h05 : Club (loisirs)
- X 17h50 : étude
- X 18h40 : dîner

B' an hunva

- X 20h10 : jeux au foyer ou veillée
- X 21h20 : extinction des feux

Da vintin

- X 7h00 : réveil
- X 7h00 : petit déjeuner



PERZH AR GERENT

- X Kemer perzh er c’huzul-merañ
- X Kemer perzh er c’huzul skoazell
- X Dileuriañ ar gerent er c’huzulioù klas
- X Dileuriañ ar gerent er c’huzul skolaj
- X Sikour a youl vat
- X Aozañ ar c’henweturiñ
- X Reiñ arc’hant d’ar gevredigezh

LA PARTICIPATION DES PARENTS

- X Participer au CA (Kuzul merañ)
- X Participer au comité de soutien (Kuzul skoazell)
- X Représenter des parents d’élèves aux conseils de classe (kuzul klas)
- X Représenter des parents d’élèves au conseil d’établissement (kuzul skolaj)
- X Assurer un bénévolat lors d’activités
- X Organiser des co-voiturages
- X Faire des dons à l’association



GOULENNOÙ INGAL PA ZEUER E 6^{VED} ...HAG UN NEBEUD RESPONTOÙ

1- Peseurt diforc'h zo etre ar skolaj Diwan hag ur skolaj divyezhek ?

- X Ar soubidigezh e buhez ar skolaj: broudañ ar skolajidi d'ober gant ar brezhoneg etrezo e- kerzh ar c'hentelioù met ivez war ar porzh, e-kerzh ar predoù, en hunva...
- X 11 danvez disheñvel kelennet e brezhoneg

2- Petra eo ahelioù meur ar bedagogiezh ?

- X Kalonekaat ar skolajidi, sikour anezho da vont war-raok.
- X Priziañ dre varregezh evit ma welfe splann ar skolajidi o c'hreñv hag o c'hlaou.
- X Derc'hel kont eus ar barregezhioù liesseurt, donezon pep hini.
- X Selaou c'hoantoù ar skolajidi.
- X Sevenadur hag istor Breizh kelennet.
- X Kelenn ar yezhoù en o yezh (saozneg e saozneg...)

3- Ha marteze eo re izel live brezhoneg ma bugel evit heuliañ mat ?

- X Derc'hel a ra ar gelennerien kont eus live pep hini.
- X Live skolioù divyezhek 'zo zo mat-tre.
- X A-drugarez d'ar soubidigezh e vez paket gant ar skolajidi buan o dale.

4- Penaos en em voazañ ouzh ar skolaj ?

- X Teurel a reomp evezh evit sevel ar c'hlasadoù chom hep dispartiañ mignoned.
- X Distro-skol ar 6ved diouzh o zu a-raok ar re all.
- X Beajig aozet e penn-kentañ ar bloaz evit ober anaoudegezh ha komz brezhoneg.
- X 10 kelenner disheñvel met ne cheñch ket klas ar skolajidi.
- X Ur penngelenner, kelennerien ha kasourien o sikour diouzh ar gwellañ.
- X Prantad buhez klas bep sizhun evit eskemm, renkiñ ar c'hudennoù.
- X Prantadoù skoazell hiniennel evit aozañ al labour.
- X Ur skolaj bihan : 8 klasad / e-tro 180 skolajiad .
- X Ur benngasourez e karg eus al live evit aesaat an eskemmoù ha skoazell muioc'h ar skolajidi 6ved.

5- Ne gomzomp ket brezhoneg - Penaos sikour ?

- X Kinniget zo un heuliañ hiniennelaet d'ar skolajidi.
- X N'eo ket dav lakaat ar skolajiad da dreiñ pep tra, met talvoudus eo goulenn digantañ ober un diverradennig eus ar gentel.
- X Gallout a rit heuliañ al labour noz hag an disoc'hoù war Pronote.
- X Lec'hienn Ofis publik ar brezhoneg pe Geriafurch a c'hell sikour.
- X Diskouez d'ho pugel eo pouezus evidoc'h, reiñ talvoudegezh ingal d'ar brezhoneg. Kinnig dezho traoù e brezhoneg en diavaez.
- X Lakaat ar skolajidi da lenn e brezhoneg, da sellet pe da selaou ouzh abadennoù e brezhoneg (Brezhoweb, Breizh VOD, Radio Kerne...).
- X Kinnig dezho kampoù e brezhoneg e-kerzh an hañv.
- X Broudañ ar skolajidi da gaozeal e brezhoneg e diavaez ar c'hentelioù evit gwellaat o live yezh.
- X Displegañ perak emaint er skolaj-mañ.
- X Deskiñ brezhoneg eus ho tu a ro ster ha sikour ho pugel. Kentelioù evit tud gour a zo: gant Stumdi, Roudour, Mervent, Kelenn...

6- Hir e vez an devezhiou ?

- X Padout a ra ar c'hentelioù 45 munutenn gant ar soñj doujañ da lusk ar skolajidi.
- X Ne vez ket labourer d'ar Merc'her : mare plijus evit distreiñ d'ar gêr.
- X Skoazell hiniennel a vez war ar sizhun.
- X D'al Lun e vez echuet gant an emvod-klas. (4e15 -5e)

7- Labour noz : diaes eo ?

- X Gallout a ra ar skolajidi gwiriekaat ar pezh a vez d'ober er c'haier-klas niverel (PRONOTE) ha skrivet e vez gant ar gelennerien ouzh an daolennig wenn.
- X Klask a reomp chom hep reiñ re a labour noz. (Deskiñ ar gentel, poelladennoù) Ouzhpenn- se ne vez ket roet labourioù bras d'ober e-kerzh ar vakañsoù.
- X Mat eo gwiriekaat eo bet graet al labour noz, met pouezus eo d'ho pugel dont da vezañ emren.
- X Ur prantad studi bep Lun/Yaou (5e40-6e45) evit an diabarzhidi gant ur raktres heuliañ al labour-noz. Ar prantadoù-se 'zo digor d'an holl.
- X Roet e vez al labour-noz hir pellik en a-raok evit ma c'hellfe ar skolajidi en em aozañ.
- X Ret eo labourer ivez d'ar Merc'her hag e-kerzh an dibenn-sizhun ; arabat soñjal e vo graet pep tra er skol (e-pad ar studi).
- X War Brezhoneg 21 (lec'hienn internet) e c'heller kavout geriaouegoù .
- X Listenn studierien/liseidi evit sikour a vez kavet war al lec'hienn "labour zo".

8- Uhel eo al live ?

- X Skoazell hiniennel a vez kinniget e 6vet klas ur wech bep sizhun / klasad rannet alies e strolladigoù / skoazell / kentelioù evit deskiñ deskiñ diouzh o barregezhioù.
- X Degemeret 'vez an holl, a bep seurt liveoù a zo amañ. Pal ar skolaj zo kas pep hini war-raok o teurel kont ouzh barregezhioù pep hini.
- X Gant ar memes programm hag en Deskadurezh-Stad, ar memes diplom ha kelennerien an Deskadurezh-Stad, ar memes ensellerien... e vez graet.
- X Al live DNB a zo eus ar c'hentañ—98% eus ar skolajidi o deus paket ar breved dibaoe krouidigezh ar skolaj ha 92% eus ar skolajidi o deus tapet ur meneg — E 2015 'oa bet disoc'hoù gwellañ skolajoù Breizh (prevez ha publik).
- X Live ar skolajidi er yezhoù estren zo peurliesañ uheloc'h eget hini ar skolajoù all.

9- Penaos 'vez sikouret ar skolajidi gant ezhommoù ispisial ?

- X Lakaet e vez e plas PPRE (Programme Personnalisé de Réussite Educative), PAP (Projet d'Accompagnement Personnalisé) ha PPS (Projet Personnalisé de Scolarisation) ha dre se e vez roet skoazelloù ispisial, da skouer :
 - X Priziadennoù berroc'h
 - X Kemennadennoù lennet a vouezh uhel gant ar c'helenner
 - X Testennoù skrivet brasoc'h
 - X Skoazellerien buhez-skol vrezhonek
 - X Ur c'helenner zo karget da heuliañ ar skolajidi lakaet diaes, ober a ra al liamm gant ar skoazellerien, ar familhoù, ar mezeg skol hag ar vouezheerien.

10- Ha ker eo ar skolaj ?

- X Ar prizioù a vez jedet hervez korvoder ha gopr-tiegezh an dud ha rannet war 10 miz (40€ evit an diavaezidi, etre 105 ha 163€ evit an hanter-diabarzhidi hag etre 139 ha 309€ evit an diabarzhidi). 10% a zistaol a vez graet d'ar familhoù o deus muioc'h evit daou vugel en eil derez (skolaj ha lise).
- X War blog ar skolaj e c'hellit jediñ enlinenn ar pezh 'po da baeañ.
- X Ur priz hollek eo evit ar skoliata hag ar raktresoù pedagogiezh (Gweladennoù, beajoù...).
- X Meur a skoazell a c'hell bezañ: ar yalc'had distro-skol (CAF), yalc'hadoù ar Stad, ha, en un doare dreistordinal foñs kenskoazell ar skolaj. Ur yalc'had ouzhpenn a zo pa vez diabrzhiat ar bugel. Meskerezh sokial ha sevenadur zo, ur binvidigezh eo.



LES QUESTIONS LES PLUS COURANTES QUE SE POSENT LES PARENTS D'ÉLÈVES À L'ENTRÉE EN 6^{ÈME}...ET QUELQUES RÉPONSES.

1- Quelles sont les différences entre le collège Diwan et les filières bilingues ?

- X L'immersion : inciter les élèves à échanger en breton entre eux pendant les cours mais aussi sur la cour, pendant les repas, à l'internat...
- X 11 matières différentes enseignées en breton.

2- Quelles sont les grands axes de la pédagogie ?

- X Encourager les élèves, les aider à progresser quelles que soient leurs difficultés.
- X Evaluer les élèves par compétences pour qu'ils comprennent mieux quels sont leurs atouts et les points à travailler.
- X Tenir compte des intelligences multiples, des talents de chacun.
- X Etre à l'écoute des élèves
- X Une place primordiale accordée à la culture et à l'histoire de Bretagne.
- X Enseigner les langues en immersion (l'anglais en anglais par exemple)

3- Mon enfant, s'il ne vient pas du réseau Diwan, aura-t-il le niveau suffisant pour bien suivre les cours ?

- X Les enseignants tiennent compte du niveau de breton hétérogène en début d'année.
- X Le niveau de certaines écoles bilingues est très bon.
- X Grâce à l'immersion, les élèves progressent et rattrapent rapidement leur éventuel retard.

4- Le collège, c'est un grand changement ?

- X Lors de la répartition des élèves dans les classes, nous portons attention à leur désirata.
- X Un établissement à taille humaine : 8 classes / 180 élèves environ.
- X 10 enseignants différents mais les élèves restent dans leur classe.
- X Rentrée du seul niveau de 6^{ème} avant les autres collégiens.
- X Séjour d'intégration à la rentrée pour faire connaissance et parler breton.
- X Un professeur principal, des enseignants et des surveillants à l'écoute des élèves.
- X Séance de vie de classe toutes les semaines pour échanger, résoudre les problèmes.
- X Cours d'accompagnement personnalisé pour apprendre à organiser le travail.
- X Une animatrice principale est en charge du niveau afin de faciliter les échanges et aider au mieux les 6^{èmes}.

5- Nous ne parlons pas breton. Comment aider notre enfant ?

- X Une aide personnalisée est proposée aux élèves.
- X Il n'est pas pertinent de demander à votre enfant de tout traduire, en revanche, il doit pouvoir vous faire un rapide résumé du cours.
- X Vous pouvez suivre le travail du soir, les résultats sur Pronote.
- X Les sites de traduction de l'Ofis publik ar brezhoneg ou Geriafurch peuvent vous aider.
- X Proposer aux collégiens des activités en breton en dehors de l'école.
- X Lire des revues ou journaux, s'abonner... Regarder ou écouter les émissions en breton (Brezhoweb, Breizh VOD, Radio Kerne).
- X Se documenter sur les séjours, camps de vacances en breton. (site de l'Ubapar)
- X Inciter les collégiens à parler breton en dehors des cours, pour améliorer leur niveau d'expression et de compréhension.
- X Montrer à votre enfant que le breton est important pour vous, le valoriser. Expliquer aux collégiens pourquoi ils sont à Diwan.
- X Apprendre le breton donne du sens et motive votre enfant. Plusieurs organismes donnent des cours pour adultes : avec Stumdi, Roudour, Mervent, Kelenn...

6- Les journées sont trop longues ?

- X Les cours durent 45 minutes afin de respecter le rythme des élèves.
- X Il n'y a pas de cours le mercredi, coupure qui permet de retrouver le milieu familial et les activités locales...
- X Séance de vie de classe le lundi soir de 16H15 à 17h.

7- Le travail du soir : c'est difficile ?

- X Les devoirs sont écrits sur un tableau dans la classe et consultables, via le logiciel Pronote, sur le cahier de classe numérique où sont précisées aussi les évaluations, les résultats...
- X Nous nous efforçons de faire en sorte que la quantité de travail reste raisonnable (apprendre les leçons, petits exercices). De plus, il n'y a pas de travail important donné pendant les vacances.
- X Il faut vérifier si le travail de maison est fait, mais il est aussi important de rendre l'élève autonome.
- X L'étude, tous les lundis et jeudis (17h40-18h45), est obligatoire pour les internes et reste ouverte à tous.
- X Le travail personnel long est donné à l'avance afin que les élèves puissent s'organiser.
- X Organiser le temps de travail le mercredi et le week-end. Le travail fait à l'étude n'est pas suffisant.
- X Listes d'étudiants ou de lycéens pouvant aider les élèves disponibles sur le site internet "labour zo".

8- Le niveau est-il élevé ?

- X Une aide personnalisée est proposée en 6e : travaux en petits groupes, soutien, cours pour apprendre à apprendre suivant leur profil d'apprentissage.
- X Diwan est ouvert à tous, les élèves ont des niveaux différents. Le but du collège est

de faire s'améliorer chaque élève, en considérant les capacités de chacun.

- X Le programme est celui de l'Education Nationale, les enseignants ont les mêmes diplômes que leurs collègues de l'E.N. et ce sont les mêmes inspecteurs qui interviennent...
- X Les résultats du brevet (DNB) sont excellents – 98% de réussite depuis la création du collège et 92% obtiennent une mention – En 2015, le collège a obtenu les meilleurs résultats de tous les collèges bretons (privés et publics).
- X Le niveau des élèves en langues est bien souvent supérieur aux autres collèges.

9- Quelles sont les aides pour les élèves en difficultés ?

- X Des PPRE (Programme Personnalisé de Réussite Educative), des PAP (Projets d'Accompagnement Personnalisé), des PPS (Projet Personnalisé de Scolarisation), des PAI (Projet d'Accueil Individualisé) sont mis en place, dont découlent des aides spécifiques en personnel, matériel, temps... ou en consignes, par exemple :
 - X Evaluations plus courtes
 - X Consignes lues à voix haute par l'enseignant
 - X Textes écrits plus grand
 - X Assistants de vie scolaire bretonnants
- X Un enseignant référent suit les élèves en difficultés, fait le lien avec les auxiliaires de vie scolaire, les familles, le médecin scolaire, les orthophonistes.

10- Combien coûte le collège ?

- X Les prix sont calculés en fonction des revenus et du coefficient familial et répartis sur 10 mois. (40 € par mois pour les externes, entre 105 et 163 € pour le demi-pensionnaire et entre 139 et 309 € pour les internes.) Une décote de 10% est pratiquée pour les familles qui ont au moins deux enfants scolarisés dans le second degré (collège et lycée).
- X Sur le blog, un simulateur est à votre disposition.
- X Il s'agit là d'un forfait comprenant l'ensemble des coûts liés aux projets pédagogiques (visites, voyages scolaires, manuels...)
- X Il existe différentes aides pour les familles : l'allocation de rentrée scolaire (CAF), les bourses de collège (État), et, à titre exceptionnel, le Fond Social Collégien interne à l'établissement. Une bourse supplémentaire est attribué si l'élève est interne. La mixité sociale et culturelle est bien présente, c'est une richesse du collège.



Foto : Hieronimus Art

KARTA DIWAN



1. Digor eo ar gevredigezh Diwan d'an holl familhoù a fell dezho reiñ un deskadurezh e brezhoneg d'o bugale, hep diforc'h sokiomicherel, prederouriezhel pe bolitikel. Digoust ha digor d'an holl eo ar skolioù.
2. Bez'ez eus eus Diwan abalamour da vankoù an Deskadurezh Stad na ro ket e blas d'ar brezhoneg; goulenn a ra groñs Diwan ma vo kemeret e karg he skolioù en ur servij deskadurezh publik demokratel ha renevezet e Breizh, a aotreo implij ar brezhoneg evel yezh kevredigezhel eus ar skolioù-mamm betek ar skolioù-meur en holl domanioù ar c'helenn.
3. Distag eo Diwan diouzh pep aozadur prederouriezhel, politikel, sindikadel, h.a. Rak-se ec'h embann Diwan e c'houlenn groñs he stourm ma vo doujet da gredennoù relijiel, prederouriezhel pe politikel he holl izili forzh pere a vefent gant ma ne vint ket kontrol da Zisklêriadur Hollvedel Gwirioù Mab-den. An habaskter hollret-mañ a gas Diwan da zifenn ha da vroudañ al laikelezh en he c'helennadurezh ha dont da c'hred da frankiz soñjal pep hini.
4. Diwan a laka e plas ur c'helenn demokratel o kenlabourat a-zevri gant ar gerent, ar strollegezhioù lec'hel hag ar gelennerien. Goulenn a ra Diwan digant tud ar vugale krouiñ e-touez an tiegezh un aergelc'h emsav a-benn reiñ d'ar brezhoneg e blas en o buhez pemdez.
5. Gouestlañ a ra Diwan broudañ implij ar brezhoneg d'an holl liveoù e diabarzh ar gevredigezh; Eus un tu all e kas Diwan war-raok un diorroadur sevenadurel e brezhoneg a ro da bep bugel ar muiañ a gartennoù-trec'h evit sevel e-unan e zazont had a ro an tu da vugale Breizh da gemer e karg o endro naturel, sokial hag armerzhel.
6. Disklêriañ a ra Diwan bezañ a-enep pep unneuziadur yezhel, bezañ stag ouzh ar stummoù disheñvel a eztaoladoù sevenadurel, hag embann a ra n'eus nemet o c'henklokauster a zegas unaniezh ha kenbinvidigezh stroll. Ar brezhoneg kelennet e skolioù-mamm Diwan zo an hini implijet en o endro douaroniezhel ha denel.
7. A-du gant gwirioù dilammadus ar pobloù d'en em ezteurel dre o sevenadur dezho o- unan e c'halv Diwan kement hinienn zo tomm ouzh an demokratelezh, an aozadurioù sevenadurel breizhek, an aozadurioù sindikadel, re ar gelennerien peurgetket, da stourm a-gevret ganti evit muioc'h a justis hag a-enep pep furm a vac'homerezh sevenadurel.
8. Diskleriañ a ra Diwan bezañ kengred gant an holl bobloù a stourm evit o fersonded sevenadurel, lakaet e-barzh al labourererien enbroet, hag e embann e talvez o liesseurtegezh da binvidikaat glad mab-den.

LA CHARTE DES ÉCOLES DIWAN

1. L'association Diwan est ouverte à toutes les familles désirant assurer une éducation de leurs enfants en langue bretonne, sans distinction socio-professionnelle, philosophique ou politique. Les écoles sont gratuites et ouvertes à tous.
2. Diwan existe du fait des carences d'une Education Nationale ne donnant pas sa place à la langue bretonne, mais réclame la prise en charge de ses écoles dans un service public d'enseignement démocratique et rénové en Bretagne, permettant l'utilisation du breton comme langue véhiculaire de la maternelle à l'université dans tous les domaines de l'enseignement.
3. Diwan est indépendant par rapport à toute formation philosophique, confessionnelle, politique, syndicale, etc. En conséquence, Diwan affirme que son combat exige que soient respectées les convictions religieuses, philosophiques ou politiques de tous ses membres, quel que soit l'éventail de celles-ci et tant qu'elles ne sont pas contraires à la Déclaration Universelle des Droits de l'homme. Cette indispensable tolérance conduit Diwan à défendre la laïcité dans son enseignement et à se porter garant de la liberté de pensée de chaque personne.
4. Diwan instaure un enseignement démocratique avec la collaboration effective des parents, des collectivités locales et des enseignants. Diwan demande aux parents de créer au sein de la famille, un climat propice à l'expression en langue bretonne dans la vie quotidienne.
5. Diwan s'engage à promouvoir l'usage du breton au sein de l'association à tous les niveaux; par ailleurs, Diwan promeut un développement culturel en langue bretonne donnant à chaque enfant le maximum d'atouts pour forger lui-même son avenir et permettant aux enfants de Bretagne de prendre en charge leur environnement naturel, social et économique.
6. Diwan déclare son hostilité à toute uniformisation linguistique et est attachée aux diverses formes d'expression culturelle, affirmant que seul leur complémentarité est source d'unité, d'enrichissement mutuel et collectif. Le breton enseigné dans les écoles maternelles Diwan est celui utilisé dans leur environnement géographique et humain.
7. Conformément aux droits inaliénables des peuples à s'exprimer par leur propre culture, Diwan appelle toutes les personnes éprises de démocratie, les organisations culturelles bretonnes, les organisations syndicales notamment d'enseignants, à lutter avec elle pour plus de justice et contre toutes les formes de domination culturelle.
8. Diwan se déclare solidaire de tous les peuples qui luttent pour leur identité culturelle, en y insérant les travailleurs immigrés, affirmant que leur diversité concourt à enrichir le patrimoine humain.



AR SKIPAILH PEDAGOGIEZH

L'EQUIPE PEDAGOGIQUE



Foto : Hieronimus Art

Evit titouroù melestradurezh, enskrivañ, Pronote, goulenn yalc'hadoù, hentañ...

[Pour les informations administratives, inscription, Pronote, demande de bourse, orientation...](#)

Sekretourva: Pgz: 02 98 95 57 24 - skolaj.jakez.riou@diwan.bzh

Evit titouroù war ar frejoù skoliata :

[Pour les informations concernant les frais de scolarité :](#)

Kontouriezh : kontouriezh.skolaj.jakez.riou@diwan.bzh

Evit ar Vuhez-skol : Dale, ezvezañs, emzalc'h, hunva, dafar kollet...

[Concernant la vie-scolaire : retard, absence, comportement, internat, matériel perdu...](#)

Buhez skol: pgz: 02 98 95 71 57 - penngasouriezh.skolaj.jakez.riou@diwan.bzh

Evit daremprediñ gant ar rener :

[Pour prendre contact avec le directeur :](#)

Renerezh : renerezh.skolaj.jakez.riou@diwan.bzh

Evit daremprediñ gant ar c'huzul skoazell :

[Pour prendre contact avec le comité de soutien :](#)

Kuzul skoazell : skoazell.skolaj.jakez.riou@diwan.bzh

